

Prantadoù pennañ an Eil Brezel-bed

D3 D4

1. Petra a voe bet e miz Meurzh 1938 ?
2. Peseurt stad a voe staget doc'h ar Reich ?

D5

3. Petra a erruas e miz Gwengolo 1938 ?
4. E men emañ ar rannvro-se ?
5. Perak e aloubas Hitler ar rannvro-se ?

D6-D7 D8-D9

6. Petra a erruas d'ar 1.09.1939 ?
7. Get piv e oa bet aloubet ?
8. Petra eo ar pakt sinet etre Stalin ha Hitler ? petra'dalve evit Hitler ?

D9

9. Petra eo an disoc'h ?

D-10

10. Petra eo anv ar strollad broioù a unvan Roma, Berlin, Moskow ?

D11 -12

11. Penaos he deus Alamagn taget Frañs ?
12. Daoustoc'h ez eus argadoù hag emgannoù e kornôg Europa ?
13. Penaos e vez anvet ar prantad etre gwengolo 1939 ha miz mae 1940, prantad brezel hep argadoù ?

D13

14. Peseurt galloudegezh, he-unan, a chomas da stourmiñ enep ar Reich ?

D15

15. Petra a savas an Alamaned e pep lec'h en aodoù atlantel a-benn ampech ar Saozon da zilestriñ(débarquer avec des navires) ?

D16-17-18

16. Petra a erruas da Frañs ?
17. Pegeit e oa trec'het Frañs ?
18. Petra a voe bet d'an 22 a viz Even 1940 ?
19. Perak e voe rannet Frañs e div lodenn ?

D19

20. Petra a c'houlennas Charles de Gaule ?
21. Pegoulz eo ?

D20

22. Petra a reas Hitler e 1941 ? peseurt pakt e torras ?

D21-22-23-24 25

23. Peseurt Stad'oa a-gevred get Alamagn(Ahel) ?
24. Da biv e oa al lodenn vras ag an enezennoù er Meurvor Habask ?
25. Petra a voe bet d'ar 7 a viz an Azvent 1941 ?
26. D'ho soñj petra a vo emzalc'h ar Stad taget ?

D26

27. Penaos e vez anvet ar blezad 1942 ?

D26- 30-31-32

28. A-dal 1943 piv a grogas da vout trec'h ?

D28-29-30

29. Petra eo anv an emgann ?

30. Pegoulz eo ?

31. Piv 'oa trec'h ?

D32

32. Roit anv un emgann trec'h an Amerikaned

D-35-36

33. E men e zilestras ar Gevredidi en Europa ? 2 lec'h

34. Get piv e oant skoazellet ?

D37

35. Peseurt kêr 'voe dieubet ?

36. Pegoulz ?

D39

37. Pegoulz e voe sinet an arsav-brezel ?

D42

38. Petra a voe bet en Hiroshima ha Nagasaki ?